


GWERZ



JEAN-MARIE CAER

Lazet pevar den
 Iaket an tan var tri anezho, a gret
 laeronsiou bras
Barnet d'ar maro en Kemper, d'ar bemp a viz du, 1899



VAR EUN TON TRIST

• 1 •
 Me o suppli, Drindet Santel,
 Da zellaou peden ho pugael,
 Da rei sklerijen d'am speret
 Da ziscleria d'ar Vretonet.

2

Da ziscleria, e berr gomzou,
 Oll sirkonstansou a grimou,
 Pere so bet kometet sioas
 Gant eur muntrer, un tirant bras.

3

Va speret a so oll troublet
 Kompren c'halse tud badezet
 Ober krimou vel ar re-man,
 Ep ma teu douar do lonka.

4
 A wir galon t'ha me o ped,
 Zellaouit m'ar plich, Bretonet,
 Krimou ken horrubl pere so
 Nevez kometet en hor bro.

5

Bars e pares Lannouarno,
 Tre Lesneven a Landivicho,
 En arrondissamant Montroulez,
 Eo kometet ar vuntrerez.

6

Bars er blavez trivac'h kanvet,
 Ag o ren neuze, Bretonet,
 Naontek pevar ugent ouspen,
 Vit rei skler d'an oll da gompreñ.

7

En dregont eus a viz ebrel,
 Jean-Marie Caër, barbar kruel,
 Da Velin-Soull a so bet ett,
 Dougaet var march'an droug speret.

8

An dud oa ett d'an ofern-bret
 Met ar vates yaouank, oajet
 Epken demeus a c'hwezek vloas.
 Komprenit er spont ag er c'hlas,

9

A d'oa bet Marianne Combot
 Pa nem gaw Caër vel un den sot,
 Ken koleret ebars en ty,
 Ag hi c'hwelc'hi traou dijuni.

10

Ne d'oa gwelc'het met skudel,
 Sioas pa deus ranket mervel,
 Creis labourat ag he yec'het,
 Caër neus bet 'he merzeriet.

11

Var a leur zy oa diskaret,
 Var he estomak n'oa pwezet,
 Boutet dezhi en he guinou
 An torch vez c'hwelc'hi skudellou.

12

He gouk troc'het gant eur gontel,
 Ar galon gris, barbar kruel,
 Kazi vel vez guillotinet
 En hor bro ar grimalet,

13

Goude n'oa gret ar vuntrerez
 Oa bet n'em lakat da laerez,
 Laret tremen trizek-kant liour,
 Entre arc'cant, paper hag aour.

14

Neuze n'oa tennet, kristeinien,
 Ar c'hik-sall deumeus ar souben,
 Ous taol nem laket dijagrin,
 Da zebri a da eva gwin.

15

Evet kognak eus ar gwella,
 A neuze teuas da baka
 Ar c'hik-sall e neur mouchouar.
 Goude partias ar barbar.

16

Gret n'oa he fallagries,
 Ep beza gwelet, va zud kes,
 Taolet ar c'hik e neur wezen,
 Ar monstr bras, ar galon payen.

17

Met en deiz oa c'hrim kometet,
 En eul' lannek oa bet gwelet
 Un den gwisket guis ar chontre,
 Ag e oa bet sonjet neuze,

18

E oa bet Caër eur gwir bayen,
 Rag ganthan oa eur bakaden,
 Ag ar bakaden se, kredit,
 Oa ar c'hik-sall nevoa laeret.

*** / ***